

KANAOUEN " LA VIE CHÈRE "

(Var er ton bal danse)

1 In France an amzer tremened Croyez-moi si vous voulez, Veve an dud an evurusted Et en toute tranquillité.	6 Peusket med sonjal ma mignoned La plupart des ouvriers, Boe er brezel e heint-privet De leur boire et leur manger.	11 Bara brenn ve ive kaved Et dans les boulangeries, Ag er bleud a ve lakeed Pour faire les pâtisseries.	16 A piou ve atao in dindon Mais les paysans comme vendeurs, Memez kalz e dud a fesson Parmi les consommateurs.
2 A rok er brezel ma mignoned Lorsqu'on allait à la foire, Gand Perrine vije goulenned Cinquante francs de son armoire.	7 Gwin e dije gant tickejo Trois ou quatre litres par mois. Daou hant gram bara gand karteno C'est un peu maigre ma foi.	12 Pemp kant liur ve ive gwerzed A Paris la livre de beurre, Aze ouelep kamaraded Qu'il y a des profiteurs.	17 Kar dre aman var er maez, Oui la plupart des fermiers, E zo 'no tristidigez Dans leurs fermes à travailler.
3 A pe heomp d'an n'ostelleri Du pinard à discrétion, Pe barz an hotel da zebi On remplissait le bidon.	8 Pem liur var uguen eo an uo Dans la ville de Paris, Eun doucen tebfen dustu Mais ça revient cher aussi.	13 Ne gaveint ket ker voyagi Entre Paris et Bretagne, Profited neuz er mercanti Faire des râfles à la campagne.	18 Prestig ne momp ket dillajo Car trop cher les commerçants, Na memez ive oustillo Oh pour labourer les champs.
4 Ia neuze gand hanter kant liur Tous les petits travailleurs, A gemere o blijadur Et vivaient dans le bonheur.	9 Pevar hant liur eur c'hilo kig Et oui dans la boucherie, Neusket met ar reo pinvidig Et qui mangent tous les midi.	14 Petra reont hon dirigeantet Depuis qu'ils sont au pouvoir, Mar ne neint ket qualifiet D'arrêter le marché noir.	19 Setu aze kamaradet Quelques détails de vie chère C'hoas zo kalz a ve zouezet Quand on leur cause de misère.
5 Nemed gand er koz brezello N'y a que des restrictions, A poan d'an tamou pevienno Entretenir leurs maisons.	10 Evel eo ti er charcuter Lorsqu'on achète du cochon, Atao er paourkez labourer Qui est toujours le dindon.	15 Kar tri bloa zo eru deuet Depuis la guerre est finie, Evit c'hoaz na wellan ket Changement dans le pays.	20 Arog finissan tan de c'houlenn Et où sont les profiteurs, Pe a'heint an ouvrierien Ou bien les cultivateurs. LE GAC René.

KANAOUEN ER BARA DU

(Var eur ton guerz)

1 Zilaoet oll ma mignoned Kana eur zon triste da glevet, Ia evar sujet er bara E ra default bars er vro ma.	5 Goeled remp an allemanted Deg bloa zo haloupad er bed Bars an Autriche er Slovaquie Er Pologne ag ive Russie.	9 Privet zo kalz e fransijen Ia deuz bara gand er garten, E ziousas er vugaligo Kazi partout bars er herio.	13 Eur bloavez fall zo ive bet Kazi partout eo juste an ed Evuruz homp zo patatez A goenis du dober crampoez.
2 Ar bed holl e zo affamet Gand er brezello milliguet, A paz moyen de remedi Vit hars e hamp dont da beuri.	6 Ama maint ive aeis bloa zo Ia e tibouedan demp o bro. Goeloc'h evoant ebarz er guer E hadan ed no parckeier.	10 Kemeret heint vit hoc'h a gouis, Poahed ve de brenn a mais Kaer deuz kaved bolonte vad Na neusket ken moyen de bad.	14 Nemed zilaoet ma zud vad Ker eo er hoat vid o poahad, O kar ama ebarz in France An dud ze ledan o conscience,
3 Me gred a ouel-fomp taer gwalen Brezel, kernez ag er vossen, A goelet glasker ket remedi Vit lakad.eurs evar er bed.	7 Neo ket neur ober brezello Teno an ed er grignello. Vel bars er Grèce in Indochine En Iran ag ive er Chine.	11 Hoas a ve tud e lavared Pa ve grevio declenched, Foteffe kass er vaz in dro Var faineanted er herio.	15 Pe ouelan er boulangeri Epad un heur hasten er vri Eben kaved daou liur bara Penez vo kont ben fin er bloa.
4 Ia er bed holl zo dirolled Na deuz peurz an dirigeanted Peveitte ze eur meumez tra Vije kresket demp er bara.	8 Lee'h lakad peuc'h bars er broo Labourad pep hini ni vro, A tud vad vit om hommandi Mefomp bara tout da zebi.	12 Nemed sonjed ma mignoned Neur planeten triste a kaled, Goeled er vugale ouela Défaut kaved eur tamb bara.	16 Omp zud koz e voa memez tra Roieint er parc'vit eun dors bara, Ia honez eo er guir voyen Dober marquisjen a pevien. (Composet gand René er GAC)

PLANETEN AR BILLEJO BRAZ

(Var an ton e karfed)

1

Ken trist eo er planeten, ken hon skuis a ouela.
In kreis em brassan anken non lakan da ganañ,
Dan nao war-uguen miz genver ia da hoec'h eur anter
E oan e chilao ma poste lavared hi keleier.

2

Hag e oa deuet in ordre deuz an autoriteo
De arreti ebars er France tout er pemp mil liurio,
Ha lavaret demp ober vel pe her de confessan
Faute taol an ne e mez er billejo brassan.

3

Kazi stoked oalc'h e oan neuze war er moment,
Gwelet pesort labour vad re ar gouarnement.
Er c'helo oa ed founus mesk ar population,
Kalz da zoute koulz a me oa touchet o c'halon.

4

Er groz deus ar pevieno aze zo bet tapet
Gant billejo pemp mil liur voa gante espernet.
An eurz voa der lun vintin pe vije eru an heur
Ia monet gante d'ar poste pe ti er perepteur.

5

Partial e ree an dud, ia gant eun air kontent
De gass ho billejo braz tout der gouarnement.
Bean oant ive ma unan mesk ma c'hamaralet
In toul dor er percepteur c'hortoz vije digoret.

6

De nao heur deuz ar mintin oa digoret an nor
Ha nem fourred an dud ebars ken gwas vel eur tol mor.
Met kredet e c'hanon mad aze voa bout ha jeu
Den c'houlenne chom varlerc'h dober la queue leu-leu.

7

A joaus e oamp enan kazi tout da oueled
Koulskoude hon zur e oalc'h nag e oa poan spered.
Hani bet ne ma gwellet e c'hober zello treuz
Met ma ket gwellet ive paotred ar lessiveuz.

8

Neo ket evel in Zant-Nazaire zo eur paysan impar
Nevoa laket he lessiveuz de kas de gand i c'har,
A staget i lon kezek, herve e meuz klevet,
Memez ebars er radio me heo bet annoncet.

9

A kredet a c'hanon mad enan oa plijadur,
Pegwir oa ket a neni met tri e pemp mil liur.
Met neo ket bet honoret er malhurus payzant
Kar aze voa foutan goap deuz er gouarnement.

10

Neo ket mesk er labourerien, in tamo menajo,
A ve gered er paper bemde a villiono.
Ken neubeut ebars in ker evel aman var er maez
Eo milionerien an dud na mar heint bet honez.

11

Nemet eun drouk zo in korf, ia paotret er bluen,
Goude uzan rer o brago bemde war eur skaon.
Pe oa annoncet er c'helo e oa seder ho min,
Pe oamp chanj hon billejo devoa c'hoant da c'hoarzin.

12

Er vech ma e lavarint heint da vean tapet,
Dispakan rei er billejo deuz press er c'hrokantet.
Pegwir sonj gand ar rezeo tout er labourerien
Gereint paper e c'hargou evel chare er fouen.

13

Er sort ze deuz ket daou wennek in godel o chupen,
Nag eur billed pemp mil liur in fons o terreten.
Sur e heint da touch o pae o ia eur vech er miz,
Ag ho retraite goneet, c'hoaz veont ket gwal skuiz.

14

Ag atao e c'hober fend gant er labourerien,
Var dlgar deo in avance o neubeut gweneien.
Ni nomp ket evit fiout var er gouarnement.
Ve ket roet demp eur retraite de bemp bloa anter kant.

15

Met alies-oc'h e hani a ve d'omp kritika
Evit e memp mignoned de fournis demp bara.
Labourad e remp bemde pep hani ne vicher
Ken koulz bars an usino evel bars er parkeier.

16

Ag atao vo laret demp kreski de labourat
Gant daou hant gram bara brenn memp bemde de chakat
Med me ho ped mignoned, labourerien er vro,
Ne fot ket demp non jeni e gant hon billejo.

17

Pedomp Doue assemblez ag ive er werc'hez,
A voint preservet deuz ar skorn hon bloavez patatez,
Ag e refomp er casse-croûte ia joaus a content.
Goude rei hon billejo tout d'ar gouarnement.

18

Ag a tebfomp bara du, dour heñ ha patatez,
Evit ma kresko ar garante tre Yann hag he vaouez,
Kar divar eun tamik brenn ag eur c'hofad pato
Vo gwelet mesk ar bevien fors tamou burzudo.

19

Donet ran de finissan in kreis ma c'hanaouen,
Ag e lar-fen dac'h eoalc'h eo trist er planeten.
Kar bean e zo tud fall tremenet o amzer
A bet de o goalc'h e poan geri hon zam paper.

20

A tennan an ne breman en deuz tre o daoarn
E neur ober eun noz-vez gant a reo zo houarn
Ag evel da ugen bloa homp prest de had kommans.
À Vive la République evit hon récompans.

Komposet gant René er GAC.